

# BADEIANT KLEIER

— Lokmikel-an-Trez —

BLAVEZ 1909 .

I

Kleier Lokmikel benniget,  
Ra deuy ho son melus ha skelt  
Da dihuni bemde, 'n hon bro,  
Yez Breiz-Izel, fe hon zado!

II

Dre labour person Lokmikel  
Ha zikour vad an dud fidel,  
Tri gloc'h hon zent koz a veulo,  
Gloar da zant Mikel a gano.

III

An hini bras drant a laro :  
« An oabl glas eo breman ma bro ;  
Anna Loïs Mikel galvet  
Vit 'vo Doue ganin meulet. »

IV

— « Yvonn, Maudez, Jenovefa  
Eo ma hano dalek breman,  
'Gano 'n eil kloc'h dre renk ar pouez ;  
Me veulo ar zent hep paouez. »

V

— « Me, ar bihanik eus an tri,  
'Gano lirzin kloc'hig Mari :  
Med ma mouezig gañt levenez  
'Bedo rouanez an Elez. »

## VI

Sonet sakrifis an ofern  
 Ma teuy Lokmikelis a vern  
 D'adori korf, gwad o Doue,  
 Da bedi ar zent, an ele.

## VII

Pellaet diwar tud hon bro  
 Tarzo kurun hag avel-dro;  
 En arne groet d'ar Gristenien  
 Kas da zant Mikel o feden.

## VIII

Mintin ha noz ha da gouls lein  
 E larfet d'imp : « Gra eur sav-kein,  
 « Hag arôk mac'h i da zibri,  
 « Kan an Anjelus da Vari ».

## IX

Ar zul a zo devez Doue ;  
 Stankoc'h c'houi laro en de-ze :  
 « Ar zulio Zantel a viri  
 « Evit Doue ma serviji ».

## X

Pa vo eur bugel da Jezus  
 Ganet d'ar vue peurbadus,  
 C'houi embañno en eur dreger  
 Eo kloset outan an ifern.

## XI

Ar vam, pe hén klevo neuze,  
 Rento trugare da Zoue  
 Dre m'eo e bugelig gwalc'het  
 En gwad Jezuz, Zalver ar bed.

## XII

Na kaerat devez a welan  
 O tarzan vit ar bugelig-man !  
 Roue an nenv diwar e dron  
 A disken seder 'n e galon.

## XIII

Kleier skeltrus c'houi dregerno  
 D'emban ar c'helo tro-war-dro,  
 Ha Lokmikelis a vanden  
 D'o ilis koant redo laouen.

## XIV

Skedi ra de kaer an dimei,  
 Jousted vras a zo en ti ;  
 Kleier, d'an daou bried neve  
 Laret : « Karet 'n eil egile. »

## XV

Deut eo gant e fale'h an anko  
 Da diverat prim ho teio,  
 'Glever dre-oll nemet klemmou,  
 Daero poanius ha hirvoudou.

## XVI

Kleier klemmus, dre zon iskiz  
 Kanet breman : « *De profundis* »,  
 Ma laro 'n oll vit an ine :  
 « *Ar Requiescat in pace* ».

## XVII

Sonet drant, Kleier Lokmikel,  
 D'ho tever noz-de bet fidel,  
 Servijet mad Doue hon Tad,  
 'N Ilis hon mam ha Pi, ar Pap.

## XVIII

D'hon Eskob mad kanet bennoz,  
 Difen ra fe, yez hon zud koz;  
 Meulodi da Dom Jul Morelle,  
 A gar ar Pap, 'n Ilis Santel.

## XIX

Mil trugare laouen kanet,  
 D'ar vikel-vras 'n eus ho sakret,  
 D'ar Breizad Dom Erwan Pennec,  
 Den disket-tre ha kalounek.

XX

Bennoz da berson Lokmikel,  
D'ar pastor mad, Dom Per Deniél!  
Ra chomo pell en hon zouez,  
D'ober zent gant tud e barrez!

XXI

Kanet bennoz da Dom Botrel,  
D'ho paeron, maeronez fidel,  
D'an oll dud vad, d'ar veleien,  
'Deus o prenet dre aluzen.

XXII

Breman netra na fell d'in ken,  
Med ho klevet deus lein an nenv,  
Meuli ganec'h 'n Otro Doue  
Ha zant Mikel gant e ele.

**PERSON TREDREZ**